

A me o sonjal neuze.
Pa oan c'hoosa pot yaouank
Ma rajeun eur marc'hadour
E chonejen arc'hant.

Bet on marc'hadour fao
Marc'hadour pabioles
A marc'hadour pis glaz
Marc'hadour patates.

Marc'hadour galao
A marc'hadour boesson
Anvet oan pot ar giz mad
Bars en ker Lannion.

Anvet oan pot ar giz mad
Bars en ker Lannion
Plassa ren domistiket
En tier a fesson.

Marc'hadour kos dillat
So hanvet flipiri
Onnes so 'vicher vad
Nep a oar anezzi.

An neb a bren marc'hat mad
A gouda guerza ker
Enes rafe e fortun
Ebars en ber amzer.

Bet on marc'hadour koatau
Marc'hadour plous pe gojol
Marc'hadour lunedo
A marc'hadour monchonou

Marc'hadour tolenco
Karteno, monaitec

A chansonsonnio a cerzen
Ia, pa mije amzer.

Marc'hadour bric a brac
So anvet merseri
A pa vije hir an nos
Me a re komedi.

Oeajet meus Bretagn
En ker a var ar anes
Gant ma vilosped
A ma marc'hadourcz.

Vel seton deut aben
Da c'honit ma fortun
En eur lezel ar poesson
Ar merc'het hag ar butun.

An nep-a neuz e'e hempeset
Se e ano Jean-Louis
A zo ganeet e Plestin
Kichen Toul-ar-Hiry.

E ano pen da ben
E Jean-Louis Guyader
A ra e zemerang fix
En paros-Treduder.

Breman e neus choajet
Eur vicher tr vrawa
Pa ve skuis o labourad
A chom da ziskuiza.

Ones so eur vicher
Ag am gra disourci
Vank din met eur Varijeann
Kontant da zemezi.

FIN

Peder mestres a meus bet
A oa deus a Dreguer
Mes iaouankie a oant c'hoas
Na Ouent ket o micher.

Iaouankie a oant c'hoas
Ouent ket o micher
C'beink gant lostea o c'hivis
Da diskenn ar goter.

Un a né so Perrinic
Ag ében Mari-Jeann
Unan al so Mari-Louise
Ag ében Mariann.

Na c'houllan ket diskleria
Piou a c'he reze
Un anhe e meus klévet
A spisse ne guele.

Ag unan al anheze
A blije din er fad
Ag ones a mije bet
Peneverte e zad.

An diou al a meus klévet
A blije dè guinardant
Se so kos din c'hon chommet
C'hon chommet pot yaouank.

Propriété réservée.

GUYADER Jean-Louis.

Chanson ar Finistère

C 967-4

VA BRO ALAOURET

Gant ar Bleun Lann ag ar Bleun Balen

HAC AN TOUR DANTELEZET

Var eun ton Galoc

Br Finistère e zoun bet ganel,
He Castel-Paol eo man va brô ;
Ar vrô guëlla a oufet cavet,
Ha caëra Tour zo tro war drogoù lej,
Me o c'harie, me o admire,
Quelies deiz ro Doue, me lavaret,
Me gar ma Brô alaouret,
Va Zour dantelezel.

Mes pa oa rentet din ar c'hélon
E zoa ret quittat, va mestrez,
Ha mont da heuill an tabourinoueg
Dilezel tad ha tieguez,
Me meus changet ha lavaret,
Oh ! n'ant'an qet, n'ant'an qet, n'ant'an qet,
Güell eo va Brô alaouret,
Va Zour dantelezel.

Hac e vijen- me en em fachet ?
Senti d'an urz me, a rângue.
Tud mechant a re scouarn calet,
Oc'h va daëlou, va ch'lémou-me,
Aac e choarzet e voa pât,
O lavaret : Yvonic ? n'ant'an qet !
Adieu va Brô alaouret,
Va Zour dantelezel.

En despet din-me, ar rejmant,
En exercic, Yvonic paourda
N'em boa na gout nac entolanam
D'anaout james droite, demi-tour,
Hac e troen evel ma sonjen
Drô ma troën, gant angen e clasqen
Güelet va Brô alaouret,
Va Zour dantelezel.

Diou'h ar gamel tam ne brofisten,
Treud, qen a güezen eus va za,
O vont varlerch ar c'horf me chomme
Bep cant pas d'en em discuiza
Hac e voelen, dre ma sonjen
Marteze qen birvigen ne voljen,
Siouas va Brô alaouret,
Va Zour dantelezel !

D'ar potr m'a n'eus nemet eur remed,
(Em'e doctor) : eur c'honjo mad ;
C'gueilt-en.. entrezec ar vêred
E querz ar c'heas paour timad.
Ha great e voe var ar guer-ze
Dal de gonje que d'ar gueñ alesse
Da gaout da Vrô alaouret,
Da Dour dantelezel !

O va brô gueaz l ô brô beniguet !
Cetu me distro en ho ereiz !!!!
A vezoz da vijen miliguet
Ar re am c'hasfe deus va Breiz !
O va Zad paour ! ô va Mam guez !
O Jantonie, va anter-tieguet !
Gloar d'hor Brô alaouret !
D'ho Tour dantelezel !

Bremân cetu me em zieguez,
Gant Jantonie, va greguic coant ;
Eur greguic doug leun a vadelez :
A ra pep tra hervez he c'hoant.
Beza hor bugaligou,
A vezoz coantic evel celigou.
O va Brô Alouret !
O Tour Dantelezel !

Hac en zo boneur pâr d'am hini ?
Nan m'en assur, a dra certen :
Ne meus mui aoun deus an ennemi,
Ha n'em bezo tanfoultr biжен,
N'eus general na caporal
A ell güelet eveldon-me ractal
Qer caér a va Brô alaouret,
Na Tour dantelezel.

Choui, soudardet va regimant,
Qersit oll d'ar victor atuo ;
Pepini en deus o zantimant ;
M'en em gar gant Jantonie brao.
Choui o redo pell dre bep brô,
Ha me chommo aman bete ar maro,
Gant va Brô alaouret,
Va Zour dantelezel.

Mes ma teufe biжен ar Zacon
Da attaqui va brô ger Breiz,
Elcal neuze, en güir Breton,
Me en tou aman var va feiz,
Qerqent e ven güir tor e ben,
Gant va Jantonie, hon daou o tisen
Hor Brô ker alaouret,
Hon Tour dantelezel.

Eun deiz, pa éruo an termen
Ma vezoz ret renta ar gont,
Dirac treid ar Barner Souveren,
Me gred n'em bezo qet a spont :
Me meus bpred ar oll caret,
Ha va Jantonie ha me admirer,
Hor Brô caér alaouret,
Hon Tour dantelezel.

FIN.